

KANNAËDIG Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 98 Here - Du - Kerzu 2016 Priz : 3€

Hon hendadoù ar C'hallianed

E miz Gwengolo 2016 e oa bet lakaet e birvidigezh korralvez¹ politikel Bro-C'hall gant ur frazenn distaget gant Nicolas Sarkozy e-kerzh ur brezegenn evit kenstrivañ da vezañ anvet danvez-prezidant en dilennadegoù da zont, ha ma oa enni an dave da lugan brudet an dornlevrioù Istor gall kozh : “*Nos ancêtres les Gaulois*”, bet desket d'ar skolidi yaouank gall e derou an ugentvet kantved, er C'hwec'hkogn a-bezh hag ivez en trevadenoù gall, en Afrika, Azia, Okeania, Amerika... Bez' e tiogele N. Sarkozy e c'helle aes-tre un Afrikad, da skouer, a felle dezhañ dont da vezañ gall, degemer an dro-lavar-se “*Nos ancêtres les Gaulois*” evit e hini, peogwir o c'houlenn bezañ gall, e tlee kemer holl ar pezh a ra Istor Bro-C'hall. Er ster-se ne c'heller ket lavarout e oa ar gaou gant N. Sarkozy, met un tammig forc'hellek² eo memestra an anvad “*gallian*” evit un Afrikad, ha ne vefe ket ken faos-se evit un Europad eus kreiz Europa o tont da vezañ gall. Kelted e oa ar C'hallianed³, hag orin ar Gelted kozh a gemer e andon e kreiz Europa, e tiriad ar stêr Danav. Un den evel Sant Marzhin, bet kantener en arme roman, a-raok dont da vezañ eskob Teurng, a oa bet ganet er pezh a zo deuet da vezañ hiziv Hungaria, n'eo ket diaes ober anezhañ un eskob gallian, met evit un Afrikad-du, e vefe disheñvel memestra. Gant ar renad jakobinat gall n'eus netra poellek, kement tra a zo forc'hellek, peogwir ez eo hêr d'an Dispac'h gall a felle dezhañ krouiñ un den

nevez, troc'het diouzh an urzh naturel hag diouzh pep trehontelezh⁴. Ur skouer gaer eus an dra-se hon eus bet gant kendaonidigezh hor c'henvroad Boris Le Lay da zaou vloaz prizon evit bezañ lavaret ne oa ket a Gelted du. Un anadurezh eo se evit kement den poellek, met n'eo ket “*politically correct*” evit an den bedelekaet⁵. Un distro d'ar c'haser ez eus bet avat d'an doare da zeskiñ d'an Afrikiz e oa Gallianed o hendadoù : evit an enbroidi afrikat-du dreist-holl ez eo ar C'hallaoued a orin (“*Français de souche*” e galleg), Gallianed (“*des Gôlwâ*”) ha n'omp ket pell da welout an Afrikiz-se, gant o niver o kreskiñ dizehan er C'hwec'hkogn, oc'h haeriñ : “Emaomp-ni ar gwir Fransizion ha c'hwi n'oc'h nemet “*des Gôlwâ*”. Un iskis a droad-fri d'an istor e vefe !

Mougadur ar ger “*Gallia*” e-pad meur a gantved

Brudet eo bet dreist-holl an anv “*Gallia*” gant levr Julius Kaezar “*De Bello Gallico*” (Diwar Brezel Gallia), met gant Julius Kaezar emañ *Gallia* el liester, rak teir *Gallia* a oa evitañ, unan *belgiek* en Norzh, un eil *keltiek* e kreiz, ma oa Arvorig enni, hag un trede *akwitaniek* er c'hreisteiz. N'eus bet biskoazh a Stad anvet *Gallia*. E dibenn an impalaeriezh roman ha donedigezh C'hlotwig (Clovis), e 481 ne chome dindan beli ar jeneral roman Syagrius nemet un tiriad bevnet gant al Liger, ar stêr Samara (Somme) hag ar stêr Meuz (Arvorig ne oa ket e-barzh) ; en tu all d'ar Samara ha betek ar stêr Rhein hag e adsterioù e oa Rouantelezh ar Franked ; bevnet en Norzh hag er Reter gant ar stêr Liger hag er c'hreisteiz gant ar Pireneoù e oa

¹ Korralvez : *microcosme*.

² Forc'hellek : *ambigu, équivoque*.

³ Skrivañ a ran « Gallianed » gant daou « ll » peogwir e teu ar ger-se diouzh *Gallia* gant daou “ll”, hag e skriver “*Gall*”, “*Gallaoued*”, “*galloweg*” gant daou “ll” ivez.

⁴ Trehontelezh : *transcendance*.

⁵ Bedelekaet : *mondialisé*.

Rouantelezh ar Wizigoted ; bevennet er C'hornog gant ar stêr Liger, en Norzh gant ar stêr Doubs hag er Reter gant an Alpoù, met o c'hronnañ darn eus tiriad Bro-Swis hiziv e oa Rouantelezh ar Vurgondiz. War-lerc'h goundigezh an darn vrasañ eus *Gallia* (nemet Arvorig deuet da vezañ Breizh) gant ar Franked, ha pa voe rannet meur a wech an tiriad-se etre mibion ar penntiern frank pa varve, e oa bet kemmet anv an tiriadoù : dindan ren Dagobert (628) e oa deuet tiriad Syagrius da vezañ *Neustria*, rouantelezh ar Franked en Norzh a oa anvet *Aostrazia*, ne oa mui eus rouantelezh ar Wizigoted, anvet e oa a-nevez Akwitania, ha Burgondia a vire hec'h anv daoust ma oa tremenet dindan beli ar Franked. Ne voe ken anv eus *Gallia*. En enep e teuas war wel, buan a-walc'h, an anvad *Francia*, bro ar Franked. Neuze, perak ez eus bet keal a-nevez eus *Gaule* ha *Gaulois* gant ar C'hallaoued ? A-benn ar fin e vije bet an Dispac'h gall en dije azblivaet⁶ an anvad-se. E miz Genver 1789 e voe embannet gant an abad Joseph Sieyès ul levrig tregernus : *“Petra eo an trede-stad ?”*. El levrig-se e tiskoueze ar C'hallianed hag ent-resisoc'h ar C'hallianed-romaned evel hendadoù an *trede-stad* (ar bobl) ouzh o enebiñ ouzh ar Franked, hendadoù an noblañsoù hag ar vrientinon. Evel-se eo ma teuas er-maez eus an deñvalijenn *Hon hendadoù ar C'hallianed*, kuzhet betek-henn gant ar gronikourion gefridiel a oa a-walc'h ganto komz eus kurioù an unpenniezh, o lakaat sevel anezhi betek C'hlotwig (Clovis). Ne oa ket diwir penn-da-benn an dra-se, peogwir ez eo bet ar Franked ar sternioù milourel ha politikel en abeg d'o mestroni war ar vro, evel m'o doa graet an dierned norman ur wech aloubet Bro-Saoz, gant Gwilherm an Alouber, hogen n'o deus ket int daskemmet anv ar vro. Heñvel ouzh ar Franked eo bet ar Vrezhoned peogwir o deus roet an anv Breizh da Arvorig. A-hent-all ar boblad *“Cornovii”* he deus roet hec'h anv da *“Kernev”*, hag ar boblad *“Dumnonii”* d'an *“Domnonea”*, rann Norzh Breizh, met steuziet eo an anvad-se hiziv. Gourlakaet o deus ar Vrezhoned o yezh war Arvorig, ar pezh n'o deus ket graet ar Franked gant o hini war *Gallia* romanekaet, e-lec'h e chome gallian marteze 90% eus ar boblañs. A-benn ar fin hiziv ar bobl a c'hellfe daskemmañ an traoù e *Gallia* gozh, e keñver yezh ha tud, muioc'h eget ar Franked, a vefe an alouberion vuslimat.

Eus pelec'h e teu ar gerioù *“Gaule”* ha *“Gaulois”* gant ar C'hallaoued ?

En ur lenn levr Alan J. Raude *“La Naissance des nations brittoniques – de 367 à 410 -”* (Editions Label LN, 29830 Gwitalmeze, 2009) e oa bet sachet va evezh gant un notenn, pajenn 123, a roe orin ar ger gallek *“gaulois”*. Bez' e lavare an aozour e teue

⁶ Azblivaet : *réactivé, renouvelé*.

an anv-gwan *“gaulois”* diouzh al Loezren⁷ roman. Dont a rae ar ger eus ar germaneg *“walhisk”* a verke ur boblañs a yezh romanek, enebet ouzh unan all a yezh germanek, an *“theudisk”*. Bez' ez eus ul Loezren *“thioise”* (o komz germaneg) hag ul Loezren *“gauloise”* (o komz galleg). Enebet e vez *“gaulois”* ouzh *“thiois”* evel *“welsch”* a vez enebet ouzh *“dietsch”*. Gwiriekaet em eus an dra-se e Bro-Swis, e-lec'h e vez graet *Welsch* eus kement Swisad galleger gant ur Swisad alamaneger. Neuze komz eus yezh *“gauloise”* (keltiek), e galleg, a-zivout ar gallianeg a zo un enep ster peogwir e verk ar ger ar yezhoù romanek. Gant ar geriadur *Larousse étymologique* a zo ganin, e vez lavaret traoù heñvel. Diwanet e vije ar ger *“gaulois”* er galleg er XV-vet kantved, hag ar ger *“Gaule”* savet diwarnañ er XVII-vet kantved. Aet on da furchal war ar genroued, hag em eus kavet tamm-pe-damm an hevelep atersadennoù gant respontoù forc'hellek evel hemañ : *“Steuziet penn-da-benn en doa an termen “Gallia” ha ne ziflukas a-nevez nemet diwezhatoc'h da geñver addizoloadenn ouiziek ar “C'hallianed”, hag e vije bet arveret an termenou “Gaule/Gaulois” evit kevyezhañ an termenou latinek e galleg, en abeg d'o heñvelder ken soniadourel ha steroniezhel, hep ma vije empleget dre ret etrezo ur maberezh gerdarzhel⁸”*. Erziwezh e oa faos div wech, ar pezh a veze desket d'an Afrikiz vihan en trevadennoù a-zivout *“Hon hendadoù ar C'hallianed”*, ha N. Sarkozy en deus taolet un taol kleze en dour e-keñver gwirionded ar meizad *“gaulois”*, met rediet en deus e genstriverion d'en em savelañ er c'heñver-se.

Orin an anv *“Gallia”* hag ar gerioù deveret dioutañ

Bez' e hañval ar Vrezhoned bezañ ar re nemeto o deus miret gerioù deveret diwar *“Gallia”* gant ar gerioù *“gall”*, *“Bro-C'hall”*, *“galleg”*, *“galloweg”*... Gant Wikipedia ha loadoù⁹ all e tesker e c'hellfe ar ger *“Gallia”* bezañ a orin keltiek, savet diwar ur wrizienn *“gal”* (nerzh, kadamded, kalonegezh, en iwerzhoneg), a vije adkavet er brezhoneg *“galloud”* hag er c'hembraeg *“gallu”* (barregezh, galloud). Ar verb gallek *“jaillir”* a vefe ennañ ivez ar wrizienn *“gal”* diwar ur verb izellatinek **galire* a orin gallianek, neuze *“g”* latin dirak *“a”* pe *“e”* a zeu da vezañ *“ja”*, *“je”* e galleg, da skouer : *“jambe”* diouzh *“gamba”*, *“géline”* diouzh *“gallina”*, *“geai”* diouzh *“gaius”*, *“joie”* diouzh *“gaudia”*, *“javelle”* diouzh *“gabella”*... hag ur gwedead¹⁰ a skriv e vije deuet *“Gallia”* da vezañ *“Jaille”* ha Gallian da vezañ *“Jallois”* e galleg hervez emdroadur reizh ar yezh.

⁷ Loezren : *Lorraine*

⁸ Gerdarzhel : *étymologique*.

⁹ Load : *site (Internet)*.

¹⁰ Gwedead : *internaute*.

Kadarnaet e c'hellfe bezañ an dra-se gant emdroadur ar ger “*Gallia*” e romaneg Breizh-Uhel hag e romaneg provinkoù gall nes. E Bro-Naoned ez eus ur barrez anvet e galleg “*St Mars-la-Jaille*” ; e-barzh embannadur kentañ geriadur Roparz Hemon, gant Al Liamm, e oa troet “*la Jaille*” gant “*ar C'hall*” dre ma oa sañset bezañ eno bevonn bro ar Vrezhoneg ha derou ar “*vro c'hall*”, evit Gildas Bernier da skouer, mar ne fazian ket. Gwir eo, e krog Bro-Anjev 2 km diouzh ar bourk war-zu ar Reter. Un tammig disheñvel e vefe orin an anv koulskoude, mar greer dave da bajenn Wikipedia evit “*St Mars-la-Jaille*”, met en defe memestra da welout gant “*Gallia > Jaille*”. Anv un tiegezh nobl a vije bet : hini Yvon XII La Jaille, an hini a savas kastell-kreñv Sant Marzh er grennamzer. Ur gourdad dezhañ, Yvon I-añ, anavezet dindan e anv latinekaet “*Yvo de Gallia*” e 1052 ha 1068, en dije savet ivez ur c'hastell-kreñv nepell diouzh Château-Gontier en Anjev, hag a zo da orin anv parrez “*La Jaille-Yvon*” hiziv. Neuze “*Gallia*” a vije deuet da vezañ “*Jaille*” ha “*Gaule*” a zo a-walc'h ur ger gant un orin disheñvel.

Diruzadur ar ger “*jaille*”

Ur blanedenn iskis a oa avat da vezañ d'ar ger “*jaille*”. E lavar ar voraerion a labourer war ar bigi a zezouge traehz al Liger etre Angers ha Naoned ez eus ivez ar ger “*jaille*” evit envel “traehz fall”, a c'hellfe bezañ anvet evel-se en abeg d'an traehz tennet diouzh ar stêr Mayenn, adstêr d'al Liger, ha ne oa ket ken mat hag hini al Liger. Hebiou da kastell-kreñv la Jaille-Yvon, savet war ribl ar Mayenn e oa tennet dreist-holl. Tremenet eo ar ger “*jaille*” er mitaweg, hogen n'eo ket evit envel traehz

fall, evit envel pezh a vez lakaet er poubelennoù ne lavaran ket, hag ar re a zastum ar “*jây*”-se a vez anvet “*jâyou*”. Savet eo bet va zi en ur c'harter eus Blaen anvet “*Gallây*” (emdroadur ur stumm kozh a oa sur-mat “*Gallac*”) ; evit tud ar c'hornad e oa bet anvet evel-se dre ma oa al lec'h ma oa diskarget eno ar “*jây*”. Savet e voe skolaj publik Blaen el lec'h-se hag o vezañ ma oa anavezet ster “*Gallây*” gant an holl dud e Blaen ha ne oa ket brav evit envel ur skolaj, e voe divizet daskemm an anv a zeuas da vezañ “*Galinet*”. Mard eo gwir an dra-se, e stader ez eo bet miret ar “*g*” derou, ha se a c'hellfe bezañ en abeg d'ar brezhoneg a veze komzet gwechall e Blaen, hag en deus miret ar “*g*” latinek hep e dreiñ da “*j*”.

“*Gallus*” e oa anvet an den “*gallian*” e latineg, met ar ger “*gallus*” a oa ivez evit envel ur c'hilhog, emdroet e “*gallo*” en italianeg bremañ. An heñvelstumm-se etre “*gallus*” (gallian) ha “*gallus*” (kilhog) a zo kiriek, hep mar ebet, ez eo bet kemeret ar c'hilhog gant ar C'hallaoued da aneval argel Heuliet en deus “*gallus*” (kilhog) an hevelep emdroadur hag e oa deuet da vezañ “*jal*”, “*jau*” e galleg kozh. Tremenet eo an amdroadur-se er mitaweg gant ar stumm “*jaw*” (kilhog) hag ez eo hep mar ebet an hevelep ger a zo tremenet er brezhoneg hag a skriver “*jav*” evit kevyezhañ ar galleg “*monture*” (aneval).

Yann MIKAEL

Ar Manif evit an Holl

Emglev An Tiegezhioù, en doa galvet da vanifestiñ e Pariz d'ar sul 16 a viz Here, aozet gant ar “Manif evit an Holl”. Savet abred-tre d'ar Sul vintin e oa loc'het ar c'harr-boutin diouzh Brest da 4 eur, ha goude bezañ arsavet e Landerne, Montroulez, Gwengamp ha Dinan da sammañ an dud, en em gavjomp da 13 eur e Pariz, “Porte Dauphine”, hag e treuzjomp karterioù Kornog Pariz evit tizhout an “Trocadero”.



200.000 a dud a oa bet, hervez an aozerien, 24.000 hervez ar polis, ar pezh n'eo ket onest. Hollande e-unan, e-pad an hañv, en doa anzavet e oa bet ur milion a dud o vanifestiñ a-enep al lezenn Taubira e 2013, ha n'eo ket 70.000 evel ma tisklerias ar polis. Kalz a diegezhioù a oa, evel ma oa kaer gortoz. Laouen an argelc'h, yaouank, difeuls agrenn. Daoust hag e vezint selaouet ? Da vihanañ, a

ziskleir renerien ar Manif evit an Holl, e viro ar vanifestadeg ouzh ar PSF da vouezhiañ lezennoù all a-enep an tiegezhioù. Betek-henn, da vihanañ emezo, o deus miret ouzh ar gouarnamant da aotren ar PMA hag ar GPA gant manifestadegoù bras-divent 2013 ha 2014.

Unan eus ar palioù pleustrek all a oa, sur-mat, pouezañ war “Les Républicains” evit dibab o dileuriad evit mouezhiadeg miz Mezheven 2017 evit

kadoriadelezh ar Republik. Er vreuradeg kentañ a oa bet d'ar Yaou a-raok war ar skinwel ne oa bet anv ebet eus Lezenn Taubira nag eus an naontek poent all vroud ar Manif evit an Holl da zifreñ kement. Hogen, diwar ar seizh a oa war ar renk, ne oa nemet Jean-Frédéric Poisson o vanifestiñ, pa-z eo an hini

nemetañ en o zouez mennet da nulañ al lezenn-se, a ya, forzh penaos, a-enep ar Gwir Naturel.

Perak o deus manifestet ?

1. Da gentañ-holl a-enep lezenn Taubira, evel 40 % eus an dud e Frañs (ha 61 % eus an dud “a-zehou” hervez an sontadurioù diwezhañ) ;

2- A-enep ez int ouzh ar raktresoù da aotren ar GPA , da heul lezenn Taubira ha c’hoant Pierre Bergé da aotren “feurmiñ e gof” ;

3. A-enep an advaberezh gant koubladoù heñvel o rev : lezennoù an advabañ a oa evit reiñ un tad hag ur vamm d’an emzivadad, ha n’eo ket da reiñ ur “gwir da gaout bugale” ;

4. A-enep ar PMA evit ar maouezed dizimez pe ar c’houbladoù maouezed ;

5. A-enep al lezenn nevez-vouezhiet da lidañ ar PACS en tiez-kêr, ha da c’hellout torr-dimeziñ hep barner ;

6. Ivez a-enep ar gwir a zo bremañ da “gemm rev”, pe rag-anv, netra nemet en ur gemenn-se dre lizher d’an tiez-kêr ;

7. En anv frankiz ar gerent da zivizout penaos e vo desket o bugel, a-enep ma vez ret hiviziken goulenn aotre pa zivizer sevel ur skol dishual digevrat gant ar Stad ;

8. A-enep kelennerezh damkamiezh ar “gender” er skolioù war zigarez komz eus an ingalded gwazed/maouezed, d’un oad m’o devez ezhomm ar vugale da gaout patromoù hennadel kreñv d’o sikour da dreuziñ ar grennardiezh ;

9. Kemm an diarbennoù-kelenn ne aesaont ket buhez ar familhoù : ar skol d’ar Merc’her p’o doa kerent ‘zo dibabet chom hep labourat d’an deiz-se d’ober war-dro desavadurezh o bugale, pe/ha d’o c’has d’ar skol-gatekiz d’an deiz-se ;

10. War dachenn gwir al labour, n’eus ket mui ar gwir da ginnig ur post labour gant nebeutoc’h eget 24 eurvezh ar sizhun, ar pezh a ya a-enep ar gerent a fell dezho gouestlañ muioc’h a amzer d’o ziegezh ha war-un-dro labourat ivez memeztra ;

11. War zigarez an ingaldedouriezh gwazed /maouezed ne c’hell ket mui ar mammoù kaout un ehan hir a-walc’h goude ar ganedigezhioù, evel pa c’hellfe ar wazed reiñ bronn d’o magadell !

12. E 2013 ha 2014 ez eo bet izelaet dre ziv wech usvevenn ar Rannad Tiegezhel evit an tailhoù, ar pezh a zo kastizañ ar c’houbladoù o devez bugale e-keñver ar re a zo divugel ;

13. Evit an adc’hoprou-tiegezh, ne vezont mui deroet hep derc’h el kont eus gounidoù an tiegezhioù : n’eus ken a bolitikerezh evit an tiegezhioù : gwariet eo bet evit bezañ e servij ar politikerezh sokial ;

14. An adc’hopr da geñver ur c’hanedigezh a vez talet gant dale bras, ar pezh a zo diaes evit kontoù an

tiegezhioù o devez mizoù bras pa zeu ur bugel er bed : prenañ traoù evit ar bugelig, kemm lojeiz, kemm karr, paeañ mizoù diwallerezh ... ;

15. An distaol war briz ar predoù er skol pa vez tri bugel hag ouzhpenn er skol a zo bet lamet kuit : un taol fall adarre evit an tiegezhioù o devezh tri bugel hag ouzhpenn.

16. Kollet o deus an intañved hag an intañvedez an hanter lodenn eus ar Rannad Tiegezhel o devoa evit bevañ savet o bugale.

17. Usvevennet da 1000 € dre vloaz kresk o retred d’an dud o deus savet tri bugel hag ouzhpenn. Padal, eme ar Manif evit an Holl, o deus gouestlet kalz arc’hant da sevel o bugale, hag ez eo int-i eo a bae ar retredoù a-vremañ ;

18. Ouzhpenn da se, e vo ebarzhet hiviziken ar c’hresk-se usvevennet da 1000 euro ar bloaz e asied an tailhoù war ar c’horvoder ;

19. Dizale e vo kemedet¹¹ an tailh war ar c’horvoder war-eeun war ar follennoù-gopr. Kement-se a seblant dister, met, pa soñjer, e kemmer evel-se ster an tailh-se a veze graet betek-henn war bep oaled, war bep tiegezh. Evel-se e nac’her ur wech ouzhpenn pouezusted ar familh, ha ne chom nemet an hini-den e-tal ar Vamm-Stad ; ar *think-thank* sokialour Terra-Nova en deus embannet ne felle ket dezhañ e vefe kendalc’het “e lakfe ar c’houbladoù boutin o gounidoù”.

20. An hini na labour ket er c’houblad a veze kemeret e karg gant Kedskor he fried (pe e bried). Bremañ avat e vo kemeret e karg war-eeun gant ar C’hedskor (CMU), met an hini a labour a ranko talañ un dell ouzhpenn diwar e gorrvederioù nann-goprel. Un dra ouzhpenn a-enep gwirvouderezh ar c’houblad hag ensavadur an tiegezh.

“P’emañ al lanvad bras a vilionoù an enbroidi o tontre en Europa, ul lanvad o kreskiñ dalc’hmat abaoe dekvloavezhioù, gant poblañsoù ha n’o deus ket aon da gaout bugale, ha p’emañ dic’houest ar memes-tro ar Stad-C’hall da zisgreskiñ niver an diforc’hadoù-bugale (ur vrazedded war bemp e Frañs a vez lakaet un termen dezhi da lavarout eo kement hag an enbroerezh bep bloaz, 33 % eus ar maouezed e-pad o buhez a ziforc’h o babig, 44 % e-touez ar maouezed dindan 24 bloaz, 10 % a-raok 18 vloaz, ha 9,5 % eus ar maouezed a ra div wech. En Europa e c’hoarvez daou sioc’hanadur bep munutenn), ez eo a-bouez bras kemm ar politikerezh war-dro an tiegezhioù, rak an tiegezh a zo kellig diazez ar gevredigezh. Hep an tiegezh n’eus ket a gevredigezh padus. Evit ma vevo Breizh ez eo ret mat derc’hel mort da ensavadur an tiegezh, a zo un tad, ur vamm ha bugale, ha netra ebet all.

Tepod Gwilhmod

¹¹ Kemediñ : *fiscaliser, percevoir l’impôt*.

War hent an darblegidigezh

Darblegidigezh hag emblegidigezh

Bez' e c'hell ar ger brezhonek "darblegidigezh" kevyezhañ ar ger galleg "soumission" ha war-un-dro ar ger arabek "islam", peogwir abaoe embannadur levr Michel Houellebecq, "Soumission", e tlefe pep hini ac'hanomp gouzout gwir ster ar ger "islam", ken dezvarnet¹² kriz eo bet al levr-se gant ar meziennou "mainstream" skorennet¹³. Un nevezc'her eo, ha tud 'zo a soñjo diouzhtu : "brezhonek chimik !" Ya ! Met savet gant gwrizienn, rakger ha gourfennc'her brezhonek. Ur rakger gant ar ster "kreñvaat", "en-dro da" eo "dar", hag anavezet mat, da skouer gant ar gerioù "darvoud", "darempred", "darbet", "darev", "dargreiz"... ; ar wrizienn "pleg" a gaver er verb "plegañ" hag ar gourfennc'her "-idigezh" a verk un argerzh o vont en-dro. Arabat droukveskañ "-idigezh" gant ar gourfennc'her "-adur" a verk un dra klok, termenet, gourfennet, hag er ster-se hor befe ar ger "darblegadur", hag er broioù ma-z eo trec'h an Islam enno e c'heller lavarout emañ ar broioù-se dindan "darblegadur" an Islam. Pa soñjer penaos e oa gwelet hor yezh ha yezhoù bihan all gant dispac'herion c'hall evel Barère de Vieuzac a rae outo : "*des jargons barbares et des idiomes grossiers qui ne peuvent plus servir que le fanatisme et les contre-révolutionnaires*", e c'heller diskouez ez eo ar brezhoneg ur yezh pinvidekoc'h eget ar galleg e damanioù 'zo. E-lec'h kaout ur ger hepken gant ar galleg, evit ezteurel ur meizad, "soumission" da skouer, hon eus un toullad e brezhoneg. E-skoaz da "darblegidigezh" (soumission par contrainte) hon eus "emblegidigezh" (soumission volontaire) hag "darblegadur/emblegadur" (soumission effective, c'hoarvezet). Darn a lavaro marteze ez eo un tammig luziet ha dreist-ezhomm arverañ hevelep arlivioù¹⁴ evit ur ger ha n'eo ket hollbouezus en hor yezh. Ya ! Emañ ar gwir ganeoc'h evit ar mare, hogen dont a raio da vezañ a-bouez marteze a-benn nemeur, ha pa lavarar d'un nevezvrezhoneger n'eo ket reizh ar frazenn : "*resevet em eus un taol pellgomz*", en abeg ma vefe komprenet gant ur brezhoneger a-vihanik, e vefe un taol degemeret war e benn gant ur pellgomzer, e c'heller ober ar striv da asantiñ da nevezc'herioù savet gant Brezhoned o-unan ma oa lod anezho mibion kleued¹⁵, da lavarout eo mibion brezhonegerion a-vihanik.

Komprenet hoc'h eus petra e fell din komz oc'h implij ar ger "darblegidigezh"; ez eo evit envel aloubidigezh Europa er mare-mañ gant pobloù

¹² Dezvarn : *critiquer, analyser et juger une œuvre.*

¹³ Skorennet : *subventionné.*

¹⁴ Arliv : *nuance.*

¹⁵ Kleug : *plouk.*

arallouenn hag arallsevenadurezh, hogen ar ger-mañ a vefe evit envel an darblegidigezh merzet gant tud ar bobl peogwir e tiwaskont anezhi, dre rediezh. En enep, evit an darn vrasañ eus renerion Europa e vefe reishoc'h implij ar ger "emblegidigezh", rak n'int ket enebet outi : e-gin-kaer e skoazellont anezhi.

E-kerzh miz Here em eus klevet ur politiker gall a gomze er skinwel, o lavarout he dije Italia da respont eus he folitikerezh degemer an dreuztiriaded re niverus (13000 en ur sizhun, o doa skrivet ar c'helaouennou) hag e soñje sur-mat e janglenn Calais pa vefe kavet darn anezho enni a-benn nemeur war o hent evit klask tizhout Bro-Saoz ha ne venn ket degemer anezho. E lec'h tamall war-eeun Italia e vije bet gwelloc'h dezhañ diskuliañ piv a zo kiriek eus an alouberezh-se. Gellet en deus pep hini ac'hanomp gwelout ar skeudennoù a roe deomp ar skinwel war hor skrammoù : an treuzlestradurioù kenurzhiat mat, bigi e koad kozh-Noe, mil den sammet warno, harnezet gant jilettennoù-saveteñ, pe bigi pneumatek leun a dud ivez. Ur wech aet er-maez eus dourioù tiriadel Libia, e tegouezhe diouzhtu bigi brasoc'h ha diogeloc'h ONGoù diazezet e Bro-Spagn, sañset, evit o sammañ en o bourzh hag o c'has neuze a-dreuz ar mor war-zu aodoù Italia e-lec'h e oant gortozet gant bigi ar verdeadurezh a vrezel italiat. Ur wech disammet o lestrad a dud e tistroent war-zu aodoù Libia evit en eil treuzlestradur. Piv eo an hini pe ar re a gellid an oberatadennoù-se, rak n'eo ket digoust an dra-se evel-just ?

A-dra-sur ne vank ket e-touez ar vankerion vras, ar renerion embregerezhioù liesbroadel, holl bedelourion hag a fell dezho e vefe distrujet an harzoù - hag ar vroadoù, kement hag ober -, evit gellout kenderc'hañ, gwerzhañ ha kenwerzhañ hep bezañ direnket gant netra na den. E-touez an holl dud vat-se ez eus dreist-holl George Soros, bet ganet en Hungaria, deuet da vezañ amerikan. Brudet eo bet G. Soros evit bezañ bet an hini a arvrokas¹⁶ war al lur sterling e 1992, evel m'en doa graet Rothschild e yalc'hsez London e 1815, oc'h arvrokañ war ar gwerzhoù yalc'hel¹⁷ dre strewiñ ar brud e oa trec'h Napoleon e Waterloo. War-dro 1,1 miliard a zolaroù e voe priziet gounid G. Soros en afer-se. Pinvidikmor eo bremañ hag ez implij e c'hladhelv¹⁸ da zistablaat Europa. Gouezet hon eus nevez 'zo e roe arc'hant bras da frammoù prevez evit diskar al lezennoù "Pro-life" dre ar bed, hag Iwerzhon a oa unan eus ar broioù kentañ buket ganto en Europa. War an hevelep tachenn-stourm en deus kelliget ha

¹⁶ Arvrokañ : *spéculer.*

¹⁷ Gwerzhoù yalc'hel : *valeurs boursières.*

¹⁸ Gladhelv : *fortune.*

krouet gant John Podesta, a zo rener stourmad dilennel Hillary Clinton en USA, “*Catholics in Alliance for the Common Good*” ha “*Catholics United*”, daou strollad eus ar rizhenn “*Nevez-amzer*”, evit degas an dispac’h en Iliz katolik. Reoliñ a ra *Open Society Institute (OSI)*, *Human Rights Watch* hag *Open Society Foundations (OSF)*... Bezant e-barzh 29 bro emañ e gevredadoù, dave da gellidañ kement luskad emsavet a-enep kement gouarnamant-bro n’eo ket digor a-walc’h d’ar vedelidigezh. Vladimir Putin hag en deus meizet mat-tre petra eo o c’hoari George Soros a zo o paouez berzañ ouzh e gevredadoù oberiañ e Rusia. An aozadur *Wellcome to Europe* gant burevioù en Aostria hag en Alamagn hag e lod broioù all en Europa, hervez e load¹⁹ Internet, a zaspazh al levrikoù en arabeg d’ar repuidi a dremene dre Vro-C’hres hag ar Balkanioù, a zo enno an holl ditouroù, niverenn skingomz, chomlec’hioù an aozadurioù a c’hell reiñ skoazell dezho evit tremen. Kellidet eo an aozadur-se ha meur a aozadur all evel *No Borders*, oc’h oberiañ e Calais, gant *OSF* Soros evel an treuzlestradoù treuztiriaded adalek aodoù Libia.

An dra-se a oar holl renerion Stadoù Europa gant an holl servijoù-titouriñ a zo en o servij. Pa c’hell n’eus forzh petore keodedad *lambda* en em ditouriñ war ar genroued gant Google pe Internet Explorer hag ar rouedoù sokial, perak e vefe dic’houzvez ar renerion-stad Europa ? gouzout a reont evel-just. Merdeadurezhioù-brezel Italia, Bro-C’hall, Gres pe Spagn o deus trawalc’h a listri-brezel evit lakaat an alouberezh-se da baouez, hogen ne raio netra renerion ar broioù-se, rak a-du emaint gant ar vedelourion, evel Soros. D’ar 4 a viz Here, e-barzh ar gelaouenn alamanek *Die Welt*, e tisplege G. Soros, en ur pennad komzoù dieub, e tlee an UE aozañ un enbroerezh a-yoc’h diogel hag urzhiet o tont eus ar broioù e vez brezel, hag o vezañ m’emañ poblañs Europa o koshaat, e tlee an UE rakwelout 30 miliard a euroioù bep bloaz evit-se ha e-pad ugent vloaz. Mar n’he deus ket an UE an arc’hant-se, n’he deus nemet e amprestañ d’ar bankoù. Keal ebet da vroudañ ar c’hanelezh gant an Europiz evit yaouankaat ar boblañs, Doue ra viro ! Kavout a reer gwelloc’h aesaat c’hoazh ar sioc’hanerezh evel ma ra gouarnamant sokialour Bro-C’hall er mare-mañ. Piv en dije kredet e rafe an tu kleiz ar pezh a vez c’hoantaet gant ar gevalaouriezh vras hag ar vedelourion evel Soros : digreskiñ en un doare drastus poblañs Europa dre ar sioc’hanerezh, ha lavarout da c’houde hon eus ezhomm eus nerzh-labour an enbroidi afrikat pe aziat evit paeañ hol leveoù. Tu kleiz an Emsav e Breizh, a zo a-du evit degemer brokus treuztiriaded, a zlefe prederiañ war an diac’hinad-mañ. War hent ar darblegidigezh emamp, ha kentoc’h war hent an emblegidigezh

evit hor renerion, peogwir ne reont netra evit mirout ouzh an dra-se da c’hoarvezout.

Tud all hag a hañval bezañ embleget²⁰ endeo abaoe pell ez eo hon eskibion, abaoe Vatikan II marteze, met ent-gwirheñvel a-raok se. Emañ Eskebkendaelezh²¹ Bro-C’hall o paouez embann (13 Here 2016) ul levrig talbennet : “*Dans un monde qui change, retrouver le sens du politique*”, ma vez an eskibion o vreutaat ennañ evit ar “bevañ a-gevret”, ma kred ennañ an dud a Iliz, dre ar c’hengomz etrereligiel gant ar Vuslimiz, an degemer d’ar re all, ha pa vez bec’h etre enbroidi ha tud ar vro e tamaller bepred ar Gristenion da chom hep degemer an “hini all”, evel ma tere. Lakaet e vez ar Gristenion war evezh da chom hep mouezhiañ evit an tu dehou pellañ, met netra a-zivout ar sokialourion a ra o seizh gwellañ evit lemel kement tra a c’hellfe herzel, un disterañ, ouzh ar sioc’hanerezh gwitibunet²². D’ar 14 a viz Here e responte an Aotrou Georges Pontier, arc’heskob Marseille ha prezidant ar CEF d’ar gelaouenn *Le Monde* a-zivout ar “bevañ a-gevret” gant an Islam (ur bajennad hanter er gelaouenn). Hervezañ ez eo e rez an douar e vo kaset war-raok an traoù, hag e veneg ur pemzek bennak a skolioù katolik e Marseille ma-z eus enno etre 80 % ha 98 % a skolidi vuslimat. Bez’ o deus oberoù yaouankiz, patronajoù e-lec’h ez eus ivez ar “c’hemmesk”-se, hag al lec’hioù-se a gejadeg a gasfe war-raok ar c’healioù. Stourm a reont a-enep ar gumuniezhouriezh a ra deomp sevel an eil re a-enep d’ar re all. Ne wel ket pegen diboez ez eo krouiñ skolioù katolik pa n’int katolik ken en abeg d’al lezennoù gall, evit kelenn skolidi vuslimat.

A-zivout an enbroerezh a-yoc’h, a c’houzañv Europa, ez eo heweloc’h c’hoazh e emblegadur d’an Islam, met er c’heñver-se ne ra nemet heuliañ ar Pab Fransez. Diskleriañ a ra : “*en deus mezh un tammig evit e vro pa wel Jordania vihan a zegemer 1,5 milion a repuidi, kement hag al Liban ha Gres, hag Italia a ra ar pezh a c’hellont abaoe bloavezhioù*”. War-bouez nebeut ez eo an hevelep gerioù hag ar re bet distaget gant ar Portugalad Antonio Guterres, a zeuio da vezañ warlerc’hiad Ban Ki-moon e penn ABU/ONU, adalek ar c’hentañ a viz Genver 2017 (gwelout *Valeurs Actuelles* niv. 4169, p. 45). Mezh en deus, ha muioc’h c’hoazh, ouzh ar Gristenion : “*mar ne zeuont ket da vezañ an dever a zenelezh hon eus hiziv. Ne c’hellomp ket ober garmoù-hud war Europa, war “bro gwirioù Mab-Den” ha chom hep diskouez dezho an disterañ jestr a zegemer. Bez’ ez eus un dislavar etre ar skeudenn a fell deomp reiñ eus hor bro hag ar pezh a welomp. Na zeskrivomp ket pep repuad evel un danvez-sponter ! hag ez eo ivez talantoù a zeu davedomp*”. Disoñjet en deus e

²⁰ Embleget : *soumis volontairement*.

²¹ Eskebkendaelezh : *Conférence épiscopale*.

²² Gwitibunet : *généralisé*.

¹⁹ Load : *site*.

vankint d'o bro-orin ! Ha n'en em c'houlenn ket, an Aotrou Pontier, petra a soñjfe an dud mar befe repuidi europat – e kenkaz e vefe ur brezel en Europa - o c'houlenn repu en ur vro eus ar Reter-Nesañ. Kavet diboeñ e vefe sur-mat. Stourmerion Breiz Atao, bet emholc'het gant ar Stad c'hall n'o deus ket klasket repu el Liban pe e Siria, met en ur vro keltiek all : Iwerzhon.

En enep n'en deus ket “*mez*h” da zivrudañ ar “Manif evit an holl” eus a Sul 16 a viz Here, rak evit an Aotrou Pontier, an “dimezi evit an holl”, hag e c'houlakaomp ar pezh a ya gantañ, da lavarout eo ar “gwir d'ar bugel” ne vez “*tregaset gantañ*” nemet “*un niver bennak a C'hallaoued*”, hag o vanifestiñ “*e ro neuz ur stourmerez*h arloupet”. Bez' e oa bet neuze e Pariz, d'ar Sul 16 a viz Here, 200 000 stourmer arloupet ! Bez' en deus skrivet Yves de Kerdrel (V.A. niv. 4168, p. 6) : “*Ar gudenn ez eo : bewech ma kemeront (an eskibion) ar bluenn, ez eo evit lezel da gomz hanterenn gleiz o empenn*”. Kadarnaet eo ar mennozh-se gant ar gelaouenn c'hall kleizelour *Libération* he deus kavet mat levrig an eskibion, ha gourc'hemenoù ar CTMF (*Conseil Théologique Musulman de France*)'zo bet kaset d'ar CEF (*Conférence des évêques de France*) evit embannadur he levrig pa lavar ez eo “*hep mar ebet ur vreutadenn evit ar bevañ a-gevret evel ma n'eus ket bet diouti er bloavezhioù diwezhañ*”.

Ken embleget all ez eo emzalc'h ar gouarnamant gall en deus divizet goulonderiñ en diwezh janglenn Calais eus an dek mil bennak a zirgeleion a oa bodet enni abaoe mizhvezhioù. Met n'eo ket evit o c'has en-dro d'o bro, peogwir ez int dirgeleion, nann ! Evit o dasparzhañ²³ er C'hwec'hkogn a-bezh, hep goulenn o aotre digant maered ar c'humunioù, a zo rediet d'o degemer gant ar brefeded. Breizh he deus bet he lod, gant tud a gleiz oc'h hetiñ degemer mat d'an dreuztiriaded, ha tud all o lavarout ne fell ket

²³ Dasparzhañ : *répartir*.

dezho o degemer. Un aters a chom avat en tu all d'ar priz a gousto an dasparzh-se, ha n'eo ket da zisteraat koulskoude : an ATA (skorenn amzeriat da c'hortoz) evit un treuztiriad a c'houlenn bod a sav da 343,50 € bep miz, pa sav korvoder 30 % eus ar gouerion da 354 € hepken dre viz e 2015, hervez an MSA (*Mutualité Sociale Agricole*), hag an aters-se a zo : petore dazont hon eus da ginnig d'an dreuztiriaded-se ? N'hon eus ket labour da reiñ dezho gant an niver bras a dud dilabour a zo dija er vro. Holl ez int tud yaouank, paotred evit an darn vrasañ hag a orin afrikat. C'hoant o devo da sevel un tiegezh un deiz bennak ha ne gredan ket e vo kalz a Vrezhonadezed evit asantiñ da zimeziñ ganto, neuze e vo ret gervel plac'hed eus o bro-orin evit-se ha se a vo lieskementiñ dre zaou an enbroerezh dirgel a c'houzañvomp hiziv, pa ne vo ket muioc'h gant al lieswregiezh, a zo boas er broioù muslimat. Evit ar mare, ar pezh a zo da zoujañ ez eo an argadoù revel a-enep d'ar merc'hed, evel ma-z eo c'hoarvezet meur a wech en Alamagn hag e kêrioù broioù Norzheuropa da geñver Kala-Genver 2016. Evit distanañ an dañjer-se hon eus klevet ur pastor lutheriat alaman - ha moarvat n'eo ket bet an hini nemetañ - o kinnig e vefe mat kas gisti evit bastañ da ezhommoù revel an dreuztiriaded. Ne c'heller ket bezañ embleget muioc'h, met kentelious eo war hol laoskentez.

War-lerc'h skarzhidigezh janglenn Calais ez eus bet un toullad mat a dreuztiriaded a zo deredet war-zu Pariz, ken ez eus bet prezidantez rannvro Bariz, Valérie Pécresse – a zo eus ar strollad LR ha neket eus an FN, notit mat -, evit klemm ha kinnig an diskoulm ha ne oa ket sellet evel *politically correct* betek bremañ, da lavarout eo : **kas en-dro d'o bro-orin an holl dud-se peogwir ez int enbroidi dirgel !** (7/11/2016). Daoust hag an emblegidigezh-se a rafe poan gein, tamm pe damm, da dudenoù politikel 'zo, a-benn ar fin ?

Donwal Gwenvenez

Desevel hor bugale

Tri anv 'zo en hor yezh evit treiñ “*éducation*”. Deskadurezh, Deskoniadur, Desavadurezh. An “Deskadurezh” a sell ouzh ar sammad a draoù a rankomp deskiñ d'hor bugale, e gelaouiñ. “Deskoniadur” a zo an hent a ra ar bugel evit o zapout. “Desavadurezh” a zo kentoc'h an hent a-berzh e dud evit lakaat anezhañ da “sevel”, d'en em ziorren mat, a-raok hag e-pad e amzer-krennard. Tu 'zo moarvat ober ivez gant ar ger Diorreadurezh abalamour d'ar c'hresk-se, ken souezhus, a vev ar c'hrennard d'ar mare-se eus e vuhez. Anv 'zo ganin amañ da sikour ar bugel da zont mat a-benn gant e

vuhez darempredel, kantaezel²⁴... revel ha priedel, da heul. A-bouez-kenañ ez eo. Reiñ skiant dezhañ a rank ar gerent war an dachenn-se a zo ken personel, hag ivez kalz pouezusoc'h eget forzh petra all : deskiñ sport, sonerezh, pe me 'oar. Hollbouezus eo dont a-benn da gomz gant e vugale war an dachenn-se, anez risklañ d'o gwelout c'hwitañ war o buhez, dre ma ne vezint ket bet heñchet : ar vuhez o diheñcho hep mar na marteze.

Penaos 'ta komz d'hor bugale ?

²⁴ Kantaezel : *affectif*.

Emaomp abaoe brizhdispac'h 68 gant ul lanv du a bornografiezh. Ha, war ar marc'had, abaoe nebeut amzer, gant kealiadurezh ar gender. Dirak an daou dra doñjerus ha braouac'hus-mañ (ha re all siwazh, evel an heñvelrevouriezh douget d'ar gorreou e filmoù 'zo evel «Plus belle la vie», «Bienvenue à l'hôtel») n'eo ket gouest hor bugale d'en em ziwall o-unan. War var ez int da vezañ gloazet, gloazet don a-wechoù, hep gellout komz eus se gant den ebet, dreist-holl m'en em gavont gant kenskolajidi ha kelennerien diseblant ouzh an denelouriezh²⁵ kristen. Pezh a zo da lavarout d'hor bugale a zo eeun a-walc'h a-benn ar fin. Ar Penaoz, avat, n'eo ket aes, dre ma c'hell ginañ ar bugel ma-z eomp outañ dre heg diwar-benn an traoù-se. Ivez, ral a wech e vez troet ar gerent da ober anv eus a traoù-se gant o bugale, dre elevez, ha dre ma-z eo ral e vefe plaen-mat buhez kantaezel ha revel ar gerent, pa-z eo tachennoù gwall vresk : just a-walc'h, ez eo un dever evito klask sikour o bugale a-raok na vefe re ziwezhat. Penndalc'hel eo evit o buhez da zont a dud deuet.

Abred e sav goulennoù da spered ar bugel. An dra bouezusañ da c'houzout eo e chomo garanet e spered ar bugel ar pezh en devo desket da gentañ : d'ar gerent eo eta komz abred-tre d'ar bugel, evit na vo ket gloazet diremed e spered diantek gant komzoù pe skeudennoù pe gant ar skinwel.

Ar gerent (ar vamm peurvuiañ, pa vez bihan-bihanik ar bugel), a rank komz d'o bugel en ur respont d'e vez ha d'e galon. Int eo a anavez ar gwellañ o bugel, hag a oar penaos komz d'e vez ha d'e galon, en ur ziwall mat d'e c'hloazañ pe d'e lakaat diaes.

Da gentañ e rank gouzout ez eo mat ha kaer e zonedigezh er bed.

Da eil reiñ dezhañ patrom e dad evit ar paotrig, patrom he mamm d'ar verc'hig : "Emaout o tispenn roudoù da dad/da vamm, d'ar memes oad."

E-pad amzer grenn ar grennardiezh eo dreist-holl e vo ar bugel o reiñ stumm d'e bivelezh revel : d'an oad bresk-se eo e rank ar gerent sikour dezhañ da ren stourm kalet mestroni e vuhez revel.

Ar gwellañ eo kregiñ abred, adalek ar vugeliezh tenerañ, netra nemet respont atav pa vez goulennoù war an danvez-se. Ha pa n'ouzer ket petra respont, lavarout d'ar bugel e respontot diwezhatoc'hik. Arabat gortoz pell amzer : hen ober kentañ a c'hellor. Komz gant ar bugel (diwar-benn an diforc'hioù etre ar reizhoù da skouer) a zo ret ober. Gwelloc'h re abred eget re ziwezhat. Ha Gwelloc'h re ziwezhat eget morse.

Komzoù an Tad a verko al Lezenn evit ar bugel.

²⁵ Denelouriezh : antropologiezh kristen, an termenadur eus an den a glot gant ar pezh a lavar ar feiz diwar-benn pezh ez eo Mab-den.

Komzoù ar Vamm a verko ar Wirionez.

Kement degouezh en em gavo a vo mat evit pleustriñ an danvez kantaezel ha revel gant ar bugel.

Pa vezo un degouezh yaüs : lavarout ez eo mat, reiñ kalon.

Pa vezo un degouezh fall : reizhañ evit mad ar bugel.

Pa vezo koshoc'h – krennard – e vo tu da sevel goulennoù digor evel "Ha te, petra soñjez eus se ?", "Ha te, petra az pije graet ?", "Ha te, daoust ha krediñ a rez ez eo mat evidout ?" ...

Hag ambroug anezhañ a-hed e grennardiezh, betek an oad gour ha pelloc'h c'hoazh ma vez dav.

Evit dont mat a-benn eus ar gefridi e vo ret mont e don an traoù, ha kavout an doareoù evit reiñ da gompren d'ar bugel ez eo graet Mab-den evit karout, evit en em reiñ en un doare gradus, hon eus, holl witibunan, ur c'halvadenn "priedel" : en em reiñ. Peurvuiañ e vo en em reiñ d'ar pried all dre ar briedelezh, met bez e c'hell bezañ ivez dre ar vuhez lean, beleg, ha relijiel dre vras, pe c'hoazh en em reiñ d'ur c'halvadenn all war-dro ar re baour, ar vugale dilezet, klañv, pe ar gozhidi baour, hag all. En em reiñ e vo bepred, sed aze galvadenn pep den, hent ar wir evurusted.

Prientiñ ur bugel d'ar roadenn-se a grog gant deskiñ dezhañ doujañ d'e gorf : deskiñ ober mat war e dro (Yec'hedouriezh), deskiñ goude-se an elevez, da heul servijañ ar re all (evit ar bazenn-mañ e vo tu reiñ ur profig pe ur gwennegig bennak, da c'hortoz e rafe evit ur "bennozh Doue"), goude-se bezañ troet ouzh ar re all, ha da echuiñ bezañ gouest d'en em reiñ e-unan.

Gwelout mat a reer aze ez eo ar pezh en deus graet Jezuz e-unan : en em reiñ en deus graet, betek reiñ e vuhez zoken !

Yann-Baol II en doa komzet eus "Galvadenn priedel" Mab-den, da lavarout eo eus ar ret ma-z eo desevel hor bugale war an dra-se, bezañ gouest da seveniñ traoù en un doare gradus. Kregiñ a ra er gêr, evel-just, gant traoù munud. Daou zoare a zo evit ur bugel ma vez goulennet digantañ sevel an daol : dre heg pe ... dre gaer.

Ur mare penndalc'hel eo emziskouezidigezh ar gaezougezh. Da vare ar vugeliezh ez eo barr kantaezidigezh ar bugel, ha d'ar grennardiezh e vez ar bugel ne c'hell ket ar gerent reiñ he gwalc'h d'e gantaezidigezh. Neuze ez eo a-bouez dezhañ klevout e dud o lavarout dezhañ «Da gompren a ran», "Fiziañs 'm eus ennout". A-bouez-tre eo ivez ar vignoniezh, bandennad e vignoned, a zo evel un eil-hennadelezh. Sikour e vugel da zibab mat e vignoned a zo a-bouez. Levezonet bras e vo ganto. D'ar mare-se eo e tosta an tad ouzh e vab, hag ar vamm ouzh he merc'h.

Ha penaos komz eus an traoù-se ? Kenderc'hel da ober jestroù a deneridigezh e-keñver ar bugel. A-

bouez eo evit e gempouez : diskouez a reomp evel-se n'omp ket diseblant, n'e lezomp ket «da gouezhañ» e-kreiz ar c'hemmoù bras a c'hoarvez gantañ pe ganti. Ret eo en em ziskouez o veilhañ ouzh ar bugel, karget d'e wareziñ, d'e souten, dor zigor atav. Lakaat war-wel kaerder kevrin ar vuhez hag an darempredoù priedel. Implij ur c'heriaoueg "divyezhek" : implij ur ger kalvezel hag ur ger "barzhoniel" kevatal. Bannoù-treset evel "Titeuf" a zo fall-du evel-just : distresañ a reont kaerder an darempredoù etre mignoned, etre breudeur ha c'hoarezed, gant ar gerent, etre ar priedoù, an darempred gant e "vignonez" n'int ket eeun. Titeuf a zo ur gwall-skouer a vez kinniget da batrom peogwir ez eo "fentus", hogen evit gwir e tiskar diazezoù an desavadurezh kristen.

Tri frantad a c'heller digejañ :

- Ar vugeligzh (7-11 vloaz) : Ret eo komz d'ar bugel eus kevrin ar vuhez²⁶, a-raok ma klevfe komz eus se gant tud all.

- Ar grennardiezh (Skolaj) : e sikour da ziskoulmañ ar c'hudennoù divezel, e sikour da zibab e-unan e "unded-buhez" ha da gregiñ gant e hent war-zu an unded-buhez-se.

- Ar yaouankiz (Lise, studioù-uhel) : d'an oad-se eo e tesk ar bugel anavezout "An hini e vo e "vMe", va "Me" "din-me", eme Yann-Baol II.

Mat e vo deoc'h sellout ouzh daou Web-serie a gavot war google : "Lucas et Léa", evit ar vugale ha "Hugo et Lucie" evit ar grennarded. Mat e vo sellout outo gant ar bugel.

Nadine Olier

²⁶ "Kevrin ar vuhez", gant Erwan ar Menga, ul levrig war an divoud a zo bet embannet gant Imbourc'h (5 euro) da sikour ar gerent da gomz eus se gant o bugel, just a-walc'h.

Sant Koulm (+615-2015)

Prezegenn bet distaget d'ar Sul 1-añ a viz Du 2015 gant an Aotrou TRAENOR, eskob Duin agus Coinnire (Down ha Connor) Iwerzhon, da geñver an Oferenn en Euroskinwel evit gouel meur an Holl Sent lidet e manati sant Koulm e Dalgan Park e-tal An Uaimh (Navan) en Iwerzhon.

(Levr an Diskuliadur VII, 2 ... 14 – Yann III, 1-3 – Mzh V, 1-12)

Gouel an Holl Sent a lid ar galloud eus ar Feiz e Jezuz Krist a-dreuz Istor mab-den. Gouel Kenunaniezh ar Sent ez eo.

Al lennadennoù-se tennet diouzh ar Skritur Sakr a ginnig un daolenn war ar Genunaniezh-se. Diskouez a reont ez omp dija, evit ul lod, izili ar Genunaniezh-se, hag a zamveneg ar glanaat a vevomp war hent hor buhez. Bloavezhioù, traoniennoù ha torgennoù ar glanaat-se "a zamdres skeudenn ar C'hrist" e pep hini ac'hanomp, ma-z adkemeromp komzoù sant Koulm, a lider an hêrezh anezhañ er miz-mañ e kalz parrezioù ha kumuniezhoù dre Europa ha kevandirioù all, a-drugarez da labour leanezed, leaned ha laiked misionerion Sant-Koulm. Sant Koulm, "anavezetañ Iwerzhonad ar Grenn-Amzer" evel ma skrivas ar Pab Benead XVI, a anavezze an arroudennoù-se diouzh ar Skritur Sakr.

Bet ganet e-kichen Myshall, e gevred Iwerzhon, er bloaz 543, eo chomet ur pennad mat e manati sant Sinell e Cleenish, war vord ar Lough Erne, e kontelezh Fhear Manach. Desket eno latin ha gresianeg ez a da vanati brudet sant Komgall, ken rust ar reolenn ennañ, e Bangor, e-lec'h m'eo beleget. Ac'hano ez a kuit "e pirc'hirinerezh evit ar C'hrist",

gant daouzek keneil. E lodenn gentañ e ergerzhadenn e sav manatioù e Gallia (Annegray, Luxeuil ha Fontaine e reter Bro-C'hall).

Eil lodenn e veaj a gas anezhañ, dre ar stêrioù Mozel ha Roen betek Bro-Suis, e-lec'h ma savo e geneil sant Gall manati Sant-Gall. Dre lenn Konstanza e tizh Bregenz e-lec'h e chom nebeut amzer a-raok tremen an Alpoù betek Mediolanum (Milano). Eno e prezeg e "gentelioù speredel" a zo deuet betek ennomp, a-raok mont betek Bobbio e-lec'h e sav e vanati diwezhañ ken brudet, hag e-lec'h, hervez Jonas Suse aozer ur "Buhez sant Kolomban", ha manac'h e Bobbio, ez a da anaon d'an 23 a viz Du 615, (1400 vloaz 'zo eta).

Er bloaz-mañ, kumuniezhoù kristen, eus Bangor da vBobbio, kevredet e tiegezh speredel sant Koulm o deus kounaet e breder evit an hengoun kristen ha sevenadur Europa.

Kristenien o deus en em gavet e gouelioù ekumenek en Iwerzhon, e Cleenish, Bangor hag Armagh, e sell da zizoleiñ arvez diouganel testeni ha skridoù ar manac'h-misioner-se, a-raok an disparti etre Ilizoù ar Sav-heol ha re ar C'huzh-heol hag an Adreizh protestant.

Teir c'hendael akademek, e Bangor, e Luxeuil, hag er miz-mañ e Bobbio en Italia, o deus bodet skolveuridi ha klaskerion, istorourion, hendraourion, teologourion, lizheregourion, henskridonourion, evit studiañ sant Koulm, ar bed hag ar marevezh ma veve, e skridoù, ar manatioù savet gantañ hag al levezon a bep seurt o deus bet. Ar binvioù enklask etre diskiblezhioù a-vremañ hag ar yalc'hadoù-studi a gendalc'h da ziskouez kalonegezh speredel ha deltu

an iwerzhonad-se, maget gant ar c'hoant gwrezus da lakaat da anaout anv ar C'hrist hag Aviel ar Vuhez e lez ar rouaned ha war ar maez.

Gerioù e drizekvat sarmon : “Bezomp d'ar C'hrist, rak n'omp ket perc'henn warnomp hon-unan” a verk kalon e brezegerezh kreizennet war ar C'hrist.

Ar frazenn “Ra voulo ar C'hrist e skeudenn ennoc'h” bet prezeget moarvat e Milano er bloaz 610, a verk ez eo ar C'hrist ha gras Doue kefluskerioù pennañ ar vuhez kristen. E bennad-digeriñ war pleustrevezh hiniennel ar c'hofez alies, gant pinijenn, ha talvoudegezh vras ar pare speredel a ginnig, a gendon gant Bloavezh ar Gendruerz o tigeriñ er miz a zeu.

Dodennoù eus an amzer-mañ a verk e skridoù. Er bloavezh-mañ m'en deus ar Pab Frañsez embannet e gelc'hlizher war an ekologiezh, “*Laudato si*”, eo mat degas da soñj komzoù sant Koulm en e zaouzekvat sarmon “War ar Feiz” : “Ar re a fell dezho anaout donder Doue, emezañ, a zle da gentañ anaout ar grouadelezh”.

Evel-se ivez galvadenn sant Koulm da gaout zoujañs evit dellezegezh ar pobloù, er C'hrist hag en o hengounioù, a sko ganeomp en un doare yac'hus, ni, keodedourion Europa hiziv, gant he c'hevredigezhioù keodedel hag he gouarnamantoù, a arvest hag a glask respont ouzh engroeziad ar repuidi hag an divroerien o tont diouzh broioù gwastet gant ar brezel. En e Lizher da Eskibien Gallia e skrive : “*Ni a zo izili ur memes korf, (ar C'hrist), dimp da vezañ Gallianed, Bretoned, o chom en Iwerzhon pe en ur vro all bennak !*” Kenarroud seurt diogeladenn a oa hini kendaeloù stank etre manac'h iwerzhonat ar 6-vet kantved deuet eus hengounioù keltiek en o inizi, hag eskibion Gallia ; kendaeloù o tennañ da liested an doareoù-ober e diabarzh an Iliz. E c'halvadenn da welout pep den hag ar pobloù hervez skeudenn korf ar C'hrist, o c'houzañv ha dasorc'het, a c'hell awenañ respont ar geodedourion gristen hag ar renerion bolitikel a hiziv dirak kresk dienez ar pobloù dilec'hiet, repuidi ha divroidi.

Hogen evit bezañ feal d'an Istor ha d'e skridoù atav talvoudus e tleomp kompren sant Koulm en e varevezh hag en e endro. A-drugarez d'ar manatioù ha da aozadur ar vuhez manatiel en deus savet, e welomp penaos eo an “trobarzh” en deus aduhezekeat kalon an Impalaeriezh roman. Stummet e manatioù Iwerzhon, awenet gant Tadoù an dezerzh ha skouerioù kentañ ar vanac'helezh kornogat, en deus bet sant Koulm o sevel e vanatioù hag e Reolenn, gant sant Benead, ul levezon heverk e stummadur ar vanac'helezh krennamzerel en Europa.

Hogen tizhet he deus ivez e levezon betek hon amzerioù a-vremañ, rak bez' ez eo ar c'hentañ skrivagner anavezet en deus graet gant an dro-lavar “Europa a-bezh”. E hêrezh hag e desteni o deus awenet Robert Schuman ha diazezerion all savadur Europa, a chom an ensavadurioù hag ar politikerezh anezhañ, a c'hellfe a dra sur bezañ gwellaet ha diorroet, an araez a c'hoanag hag a kengred evit pobloù Europa ha peurrest ar bed.

Kouvier omp gant gouel an Holl Sent, dre gomzoù Lizher kentañ sant Yann, da « *soñjal er garantez en deus roet dimp an Tad, evit ma vefemp anvet bugale da Zoue* » (1 Yn III, 1).

Diwar-benn ar garantez doueel-se en deus skrivet sant Koulm ar gerioù-mañ a gomz d'ar gristenion a bep amzer :

“Aotrou Doue, roit din, en anv Jezuz Krist, ho Mab, ha va Doue, ar garantez difaezhus-se, seurt ma c'hello va lamp enaouiñ ha morse steuziañ, deviiñ evidon ha bezañ sklerijenn evit ar re all.

Enaouit, Aotrou Doue, va lamp, ma skedo dalc'hmat en hoc'h iliz.

Ra intro ho karantez pep neudenn en hor boud ; ra vimp a-bezh deoc'h-c'hwil.

Ho karantez da leunio hon holl skiantoù, en doare ma ne c'hellimp karout netra all nemedoc'h hag a zo peurbadel. » (*Sarmon XII, 3*)

Brezhoneg gant Paol Kalvez

Notennoù diwar an darvoudoù *gant Yann Maneguen*

Ar Brexit dic'hortoz/ Dilennidigezh Trump / dilammadur Jupé / dilez Hollande... Evel dominoioù o kouezhañ an eil war egile ez eo, hep na oufed da belec'h hor c'has an dra-se. Ar pezh a zo sur eo e koazh levezon ar meziennoù meur war an dud. Un dra vat eo.

E derou miz Gouhere eo bet mouezhiet un atodenn d'an dezveg keodedel a vir ouzh un tad pe ur vamm da **reiñ ur feskennad d'o bugel**.

Hiviziken e Frañs e rank ur vaouez paeañ **30 % eus ar mizoù brazezed**, tra ma vez paeet pep tra pa tiviz unan all diforc'hañ he babig.

Nevez 'zo eo bet tennet kuit an dale-prederiañ a-raok diforc'hañ ur babig gant ar PSF. Ha nevezik 'zo – ret eo krediñ ez eo pouezusoc'h eget an dilabour pe an enbroerezh arloupet, o deus votet ul lezenn da verzañ ar frankiz da stourm a-enep an diforc'hañ-bugale war ar genrouedad, a vo kastizet betek daou vloaz toullbac'h ha 30.000 euro. Da c'hortoz e c'heller c'hoazh mont da welout IVG.net...

Hervez an Insee ez eo niverusoc'h hiviziken ar ganedigezhioù gant unan pe daou eus ar gerent a orin estren (ur c'hresk a 6 % etre 2011 ha 2015) eget ar ganedigezhioù diwar gerent bet ganet e Frañs (digresk a 8 % etre 2011 ha 2015).

Etre 2008 ha 2014 ez eo aet **niver ar gwalldaolioù a-enep kristen** (beredoù, ilizoù, chapelioù) eus 129 da 467. E 2015 ez eo kresket a 20 %. E 2016 e sav da 290 evit an eizh miz kentañ. E 2012 ne oa bet harzet nemet 67 den. 50 anezho a oa minored.

Hon Tad Santel Frañsez en deus kaset e c'hourc'hemenoù a gengañv da Gouba da heul tremenvan ar groñsrener Fidel Castro, ul lizher gwall drugarezus evit ar pec'her bras-se en deus gwasket ar bobl kristen e-pad un hanter kantved, lazhadeg ha toullbac'het dekmiliadoù a dud ha darbet dezhañ lakaat ur brezel atomek da darzhañ da vare John Kennedy (Bae ar moc'h).

Donald Trump en deus tweetet, hep kemer "piñsetez diplomatek" : *"e oa Fidel Castro un*

diktatour garv en doa mac'homet e bobl e-pad tost tri ugent vloaz. Bez' emañ hêrezh Fidel Castro gant bagadoù fuzuilhañ, al laeroñsioù, poanioù diempentadus, ar baourentez ha dinac'h gwioù Mab-den".

Alamagn : d'ar 16 a viz Here, e Freiburg ez eo bet gwallet ha drouklazhet Maria Ladenburger, ur plac'h yaouank, 19 vloaz, studierez hag emyouladez e kreizenn ar repuidi, gant un Afghan yaouank 17 vloaz. ARD, chadenn skinwel kentañ Alamagn, n'he deus ket kavet e talvez ar boan komz eus an drouklazh euzhus-se, doareet ganti "darvoud liesseurt" *a posteriori*. Heuget eo bet an dud hag ez eus bet ur mell breudvell war ar rouedoù sokial hag er metoù politikel. Tad Maria, ezel eus Servij gwirel Kengor Europa a zo chomet dall en e gredenn bolitikel : da geñver oferenn obidoù e verc'h en deus lakaet da ober ur gest evit skoazellañ an dreuztiriaded !. *Atav gourtamall ha droukvesk ebet !*

Buhez hon Emglev

Gant ar pezh-c'hoari "Merc'h an Eog", gant Theatr PIBA ez eus anv a heñvelreviadezh. Meneget eo war o lec'hienn ez eo aotreet adalek 13 vloaz. Diskouez a ra anat n'eo ket tre evit an holl skolajidi ha padal, nevez 'zo eo bet kaset skolajidi dindan 13 vloaz eus skolaj Plijidi da sellout ouzh ar pezh hudur-mañ. E 2013 e oa c'hoarvezet ar memes tra e skolaj Diwan Brest gant ar Film Tomboy. Ni, ar gerent, ne fell ket deomp ez afe hor bugale da sellout ouzh seurt abadennoù.

Notenn yezhadur : (dezastum kendivizoù dre internet etre izili 'zo, war-dro troidigezh ar Bibl)

E/A, "rannigoù-verb" : Reizh eo ar rannig-verb "e" e "Seizh deiz e c'hortozi" (1 Sam 10,8) rak n'eo ket "Seizh deiz" ur renadenn eeun d'ar verb gortoz er frazenn-se. Ur raganv eo "A", n'eo ket ur gwir rannig-verb met ur seurt anv eta a vez renket e lodenn gentañ ar yezhadurioù 'lec'h ma studier stummoù (morfologiezh) anvioù an traoù hag an oberoù. Ur stagell eo "E", a vez studiet en eil lodenn, hini an ereadurezh (syntax) etre anvioù an traoù hag an oberoù er frazenn. Setu perak eo ret diforc'hañ mat "A" diouzh "E", ha derc'hel d'ar reolenn eeun : "A" goude ar rener pe ar renadenn eeun ; "E" goude ar renadenn dieeun.

Em eus / Am eus : Barn 20, 6 digant Maodez Glanddour hon eus "Kemeret am eus korf va serc'h, troc'het am eus anezhañ". Met an "difazier" (meziant) a ginnig lakaat "Kemeret em eus korf va serc'h, troc'het em eus anezhañ. YBB Kervella-Kongar e 1947 a skriv er § 721 p. 379 "Evezhiadenn: : kavet e vez "da Yann am eus roet al levr", koulz ha

"da Yann em eus roet al levr". Ne lavar ket pe hini a zo reizh. "EM" a zo reizh, a dra sur, goude un anv a zo renadenn dieeun. Goude un anv-gwan verb evel "kemeret" ivez. Kemeret em eus. Goude un anv-verb e lakaan "A", da skouer : "Skriavañ am eus (graet)" met "Skrivet em eus". Deurus-tre eo pezh a skriv T. Kalvez en e levr "Brezhonegomp" p. 46-47 da heul Trépos, Favereau hag Albert Boché : ne lakaont morse "Am eus" pa n'eus ket a wir verb "kaout" e brezhoneg. Pa lavaromp "Me 'm eus un ti", ez eo : "Me" / "Din" / "Zo" / "Un ti". Moarvat ez eo dre heñvelidigezh ouzh degouezh ar renadenn eeun gant ar rannigoù-verb "a" hag "e", ez eo degemeret, da vihanañ er yezh skrivet (Jezuz pegen bras 've : "Hast am eus da welet Jezuz va gwir bried").

Al lizher d'ar Gorintidi : Wikipedia a ra gant "Al lizher d'ar Gorintiz", hogen Maodez Glanddour a rae gant "Korintidi", ha Klerg gant "lizher da Gristenien Gorintoz" hogen gant "Korintiz" evit renabl e droidigezhioù eus an eizh leksional bihan evit an Oferenn war ar pemdez. Kompren a reer perak en doa graet Maodez Glanddour an dibab en doa graet : da Gristenien Gorintoz eo e skrivas sant Paol, ha n'eo ket da Gorintiz holl witibunan, evel-just. Mar fell deomp eeunaat evit ur brezhoneg unvan e ranker mont e don an traoù. N'eo ket peogwir n'eus ket eus an arstêr-se e galleg ma ne vefe ket tu d'hen degas en hor yezh. Evel-se e vefe tu da zistagañ ur frazenn evel-se : "Amañ e Brest ez eus Brestiz e-leizh, eveljust, met e New-York ez eus tud a orin eus Brest, Brestidi, ha zoken Brestaded e leizh e Leon pa vez anv a souten o skipailh melldroad".

-iad pe -ad ? Korintad pe Korintiad ? YBB 831 a gomz eus “i” -iad o lavarout ez eo un “i” kensonenn hep displegañ. Vallée ha Favereau ne venegont netra ebet. Trepos p. 52 (pluriel breton) a zegas elfennoù hep dijejañ an traoù da vat, met netra ne vir ouzhimp da ziskleriañ hiviziken meur a reolenn-stur : -ad evit an holl c'hêrioù, broioù (er ster “annezad”) -iad mar bez ret evit un abeg a zistagadur pe evit an arstêr “poblad” : “Tud a orin eus” ha n'eo ket “broad” : kavet e vez Israelad, Israeliad. An Tour-Tan (Testamant kozh) a ra hepken gant -iad evit envel izili pobladoù Palestina en unander. -idi a vefe eta diresisoc'h eget -iz a verkfe ul lec'h, forzh penaos. -idi (a zeu eus -ad + liester kozh i, hag *-adi a zo aet da -idi dre gontammadur an eil i) a c'heller diforc'hañ diouzh -iz (diwar al latin -ensis) pa vez annezidi ul lec'h resis. Ar reolenn-mañ ne rank ket bezañ re strizh evelkent pa gaver nemedennoù : Tregeriad a vez lavaret, ha n'eo ket Tregerad, met bez e c'hellfe merkañ pe un i lakaet aze da zistagañ aesoc'h, pe da verkañ un ezel eus “poblad” bro-Dreger, rak ul Landregerad a vo lavaret a-hent-all.

A zo : Ar rannig-verb “A” ne vez ket distaget peurvuiañ, evel ma tistager “m” kentoc'h eget “am” pe “em”. Padal e seblant anat d'ur brezhoneger dizesk ez eo “eo” kement hag “e zo”, pa n'eo ket gwir pa studier emdroadur ar verb bezañ e keltieg. Met evel-se emañ : A ZO a seblant bezañ kar da EO [E (Z)O]. Distaget e vez an A bep tro ma teraou un islavarenn eeun, avat.

Kemmadur dre vlotaat da heul gerioù ‘zo evit derc'hel soñj eus ar roll anezho, e oa bet savet ur roll gant Visant Seité : “*Aba pa na ra ne tra dre holl e unan e(z) a div seul dindan da hini daou hanter eme pe war en ur en em endra a da re*”.

Geriadur an Doueoniezh 15,5 x 22 ktm, 452 p., 22 € franko : An Treizher - 17, bali ar Marn - 22200 Gwengamp, gant Turiav Ar Menteg. Gerioù pennañ an doueoniezh zo lakaet ha despizet amañ e brezhoneg evit ar wech kentañ moarvat : Doueoniezh, lidouriezh, Biblouriezh...

Gant ar pedennoù nevez lakaet war lec'hienn “Feiz ha sevenadur” eskopti Kemper ez omp bet dipitet bras, adarre, gant doareoù an eskopti en hor c'heñver : n'eo ket bet dalc'het kont eus hol

labourioù war ar pedennoù-se, hag o labour n'eo ket skrivet er skritur boutin. Dipitus.

Abaoe Vatikan II ne blije ket d'ar gloer implij ar pedennoù hengounel-se, na gaved mui neblec'h, evel an Aktoù a feiz, a garantez, a geuzidigezh... Setu aze perak hor boa embannet ar pedennoù hengounel-se en eil lodenn “Stumm dreistordinal an Oferenn ha pedennoù” e 2009, ha lakaet lod anezho ivez e “Katekiz an Iliz katolik” 2015. Ha bepred en abeg d'ar voger a gavomp dalc'hmat en eskopti hor boa savet ur bodad evit ar Bibl abaoe 2012, da gaout ur Bibl a zoare en hor yezh, ar pezh o deus Kembreiz abaoe pell.

Bemdez hiviziken e c'heller lenn “Aviel an deiz” war lec'hienn an eskopti : un dra gaer eo. Siwazh n'eo ket disi an troidigezhioù-se, met gwashañ ‘zo, eo bet dalc'het da skritur ar chaloni Falc'hun, daoust ma n'eo mui den oc'h ober gantañ.

Ma ! Ne gomprenomp ket... pe e komprenomp re vat emañ kont evel-se e Penn-ar-Bed, hag e Penn-ar-Bed hepken, hervez ez eo ret bevañ gant ar gleizenn-mañ: diouzh un tu un Iliz eskoptiel patriot gall a zo e-touez an eskoptioù e Frañs a zo aet ar pellañ war hent an emzistruj o taveiñ d'ur “Vatikan II” hervez faltazi o beleien arloupetañ, ha diouzh an tu all brogarourien a implij ur skritur unvan evit ar brezhoneg, gant ur youl nerzhus, hini GWALARN, da reiñ d'ar brezhoneg ar c'hevala en deus ezhomm anezhañ evit bezañ ur yezh evit an amzer vremañ e Breizh.

Skodenn 2017 : en abeg da greskadur dizehan priz mizoù-kas ar Post (1,36 € evit pep kannadig kaset e 2016, pa oa 0,87 € daou vloaz ‘zo, hag e vo ur c'hresk adarre e 2017) hon eus lakaet da 18 € ar skodenn 2017, met ar re a gaso 20€ a vo trugarekaet en a-raok

Evit **Nedeleg** ha **Kala-Genver** profit levrioù : *Poanioù-Spered an Tad Gwazdoue* gant Youenn Olier hag *An Emgav-Chanter ha danevelloù all* gant Yann Mikael, 18,50 € franko, pep hini. Goulennit ouzh Yann Mikael 12 straed R. Giraud 44130 Blaen

Nedeleg laouen deoc'h holl, hag hor gwellañ hetoù evit ar bloavezh nevez a zeu : *Levenez, yec'hed hag evurusted leizh ho ti!*

Mererezh :

18 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* . Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener *Kannadig Imbourc'h* : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X